

Ar butuner

e fin ebrell e komançamant mae
eun dervez e zeoa gati labourer diouz an de.

hag hi mond a lavaret kazi en eur ger ber
Biken jamez emezi nem bez eur butuner.

An den man a ioa den a speret ne lavar gir e bed
ne da den de neum damall ne met kiriet e ved

ag e neur penad goude int e neum rankontret
ar plac'h a houlen ontan e pelec'h oas chomet

Da petra, emezan, e zin d'ho koëlllet d'ho ti
Pa na doc'h ket kontant d'am goëlllet o fumi ?

— Mar a meus lavaret me a houlen pardon
me zo kontant e fumot deus a kreis va halon.

— Sallokras plac'h iaouank o trugarekat
Ar c'homzou a leverit a plij d'am daoulagad,

ma a meus arc'hant avoalc'h ewid kaout butun
A drugare va Doue ne renkin ket iun.

Pa zan me dar marc'hajou gant va marhadourez
me zo sur eus va vara a kig fresk aliez

hag eun neubeut dineret da zont gane dar ger
O c'havin da implija dre ma mezo affer.

— Fachet va mestrez ouzin abalamour ma fuman
mond en noz da c'hoari c'hartou a var an deiz da eva.

Catherine Laninor, 3 mars 1851.